

KANTIK ZANT LAURANS

War don : *En hon zouez* (N° 78).

DISKAN :

Zant Laurans, patron gallouduz,
Evidomp pedet bemde,
Ma vefomp tud a fe nerzuz,
Gwir vignoned da Zoue.

1 Zant Laurans, ar merzer brudet,
Nevoa kerent yertuzuz ;
Hag abred dean oue desket
Anaout ha karet Jezuz.

2 En bro Spagn, elec'h oa ganet,
Ar Zant ne chomas ket pell.
Ac'hane yaouank eo tec'het
Beteg Róm, ar ger zantel.

3 E zantelez oue, er ger-ze,
Anvêet en berr amzer,
Ha Zant Sixt, ar pab ba neuze,
Hen grêas avieler.

4 D'ar c'houlz, enep ar gristenjen
E oa brezel adare.
C'hoant braz nevoa Valerien
Da ziskar Iliz Doue.

5 Gant an tyrant oue d'ar maro
Kondaonet ar pab zantel.
Zant Laurans, pa glev ar c'helo,
Gant e Vestr a c'houll mervel.

6. Ar Pab laras d'he vab karet :
« C'houi am heuillo 'benn tri de »
Ha gwir eo e oue merzeriet
Zant Laurans tri de goude.

7 E holl vembro oue dispennet
Dre daouarn ar vourevien ;
E gorf zantel oue gouliet
Euz an treid beteg ar penn.

8 Evel ma vezo grøet ive
Da Zant Gorgon biniget,
Gant e vourevien didrue
War eur c'hrill eo astennet.

9 Vit hen rostan a nebeudo,
Dindanan e c'hwezer tan.
D'oust pegen kri eo e boanio,
Ar zant merzer ne ra van.

10 Laouen d'an tyrant e lare :
« Eñ tu zo poaz mad breman ;
Hastet da boac'hañ egile
Ha neuze helfet tanvan. »

11 Gouzanv 'ra gant pasianted
Ha zoken gant levenez ;
Da Zoue, 'n e boanio kalet,
E lar benoz, hep paouez.

12 Pa vo evidomp goal bonner
Kroajo, poanio ar vuc,
Otro Zant Laurans, ni esper
Ouzimp holl a po true.

13 D'ar fin, goude poanio skrijuz,
E varyo hag e nij d'an Ne.
Bepred eno dirag Jezuz
E ped 'vit e vugale.